

CANTIC

SANT THELO

TON : *Santes Mari mam Doue...*

Guechal, e Breiz-Izel, hon tud coz voa payanet,
Doue d'ho sclerigenna en devoa digasset,
Sent; evit deski dezo ar guir religion ;
Unan demeus ar reze voa hor sant Patron.

Diskan :

TON : *D'hor mam santes Anna...*

Sant Thelo, pastor mad,
Pedit vidomp Doue,
Bezit guir alvocat
Evit ho pugale.

E Bro-Zaos e voa ganet an Aoutrou sant Thelo,
Deus a gerent pinvidic, an nopla deus ar vro,
He dad voa hanvet Enzic, Guenhaff e voa he vamm,
Ar vro ma choment henni voa hanhet Cardigann.

Daou zra hag a so dibot da velet assamblez,
Tud sant Thelo d'hoa madou ha cals vertus ivez ;
Ho c'halon voa tanet gant carantez Doue,
Cetu perak ho deus greet Sent deus ho bugale.

Sant Thelo a voue kasset gant he dad hag he vamm
Da skol eun den vertuzus pa voa c'hoas iouank flamm,
Sant Dubric, a lavarer, voa he vestr skol kenta,
Hag a hadas ne ene vertuziou ar c'haera.

Buan henvel an avel an Aoutrou sant Thelo
A rede dre ar vro ma, pignet var eur c'haro,
Evit cass sicour guella dan dud clan, dar beorien,
En eur ranna etrezo he damic aluzen.

Mar boa sant Thelo damantus e kenver he nessa,
En e genver e hunan n'oa ket ar memes tra,
Rac iun a rea aliez ; vit goële da gousket,
Hor sant Patron n'en devoa nemet eur mean kalet.

An drouc speret cunnaret o wel he santelez
A glaskas coll sant Thelo dre ar fallagriez,
Poulza reas merc'het fall da vonet d'he denti,
Mes ker e coustas dezo sivoas ho falloni.

Doue zivoalle Thelo, hag on doa permettet
Ma viche ar merc'het-ze ractal diskiantet ;
Biscoas n'o devoa gellet mont betec sant Thelo,
Caër en doa an drouc-speret hegasi anezo.

Tud ar vro pa doa klevet petra c'horvezas
Ho devoa evit Thelo goude eur respet bras ;
Kals a baïanet soken zistroas ous Doue,
Eur roue bras hag he dud e voa deus ar reze.

Var dro ar blavez pemp kant, herves a leverer,
Sant Thelo a guiteas he vro hag he garter,
Evit heulia sant David, hag ive sant Patern,
E skolach brudet Polin, hag e Jerusalem.

Patriarc'h Jerusalem, hervez ma-z-eo scrivet,
Eo a reas eun Eskop deus hor sant benniget ;
A c'hano eo e teuas d'hor bro a Vreiz-Izel,
Da ziscoues d'hon tadou coz ar madou eternal.

An histor c'hoas a lavar penaos en amzer-ze
Sant Thelo en d'hoa eur c'hoar ho chom bars e Kerne,
Pehini voa dimezet d'eur c'hont hanvet Budic,
Eun den an honorapla hac ive pinvidic.

Evit renta d'he vreur caër an honor, ar respet,
Ar Zant, neur zont er vro-man, a zeas d'ho guelet ;
Mæz ne zaleas ket pell gant he vreur hac he c'hoar,
Rac he galon voa distak deus traou an douar.

Thelo voa n'em gonsacret d'ha servicha Doue
Ha ne glaske er bed-man nac honor na danve ;
Nan biscoas nen doa songet en aour, nac en arc'hant,
Cass eneou d'ar barados voa he vrassa c'hoant.

Epad seïs vla ha seïs mis, eo bet gant sant Samsom
Ho planta bars er vro-man ar guir religion
Goude voa bet escop e Landaff enn he vro,
Mæz na chommas ket eno da betec ar maro.

Scoët e voa ar vro-ze gant an derzen, sivoas !
Hac a laze vell kellen an dud, bian ha bras,
Botec a lonet soken vize ganti taget,
Ne voa vit ho farea na louzou na remet.

Oh ! pastor mad sant Thelo, nespernez ket he boan
Evit doussad ho foanniou d'an oll, bras ha bian,
A galon vad a roas ar peziec en devoa
Vit soulagi he zenvet ha clask ho farea.

Noz deis e pede Doue da galmi he goler
Ha da zellet a drue ous he vugale ger ;
Peden ar Sant voa clewet : rac eun deis ho pedi,
Doue zigassas eun aël evit he gonsoli.

Cannad Doue lavaras d'an Aoutrou sant Thelo
Mont gant lod demeus he dud racdall er meaz ar vro,
Senti a reaz dostu ous gourc'hemen an aël,
Hac e teuas adarre en dro da Vreïis-Izel.

Darn a gret ez eo neuze a reas sant Thelo
Tro ar brocession gaër a reomp c'hoas hirio
Evit trugarecad Doue da veza preservet
Lod deus he vugale baour gant pere voa heuilliet.

Pa voa fin d'ar c'hlenvejou bars e bro ar C'hombri,
Deuz ar vro-man sant Thelo a yeas adarre d'hi ;
Er vro-ze, eo e varvas peus-tost d'ar guer Marden,
Var dro ar blavez pemp cant unnec-ha-triugent.

Kerquent a ma voa maro e savas eun dispud.
Divar ben corff sant Thelo etre tri rummad tud
Re Landaff, à Pennalun-ze Landeliou-vavi
Eo an tri-rum a glaske he gorff da anterri.

Tud Landaff ho d'oa erfin gonezet ar victor
Hac eno oa interet hor patron hor pastor.
Var he vez a c'hoarvezas niver a viraclou
Aroc ma voa digasset deomp-ni he relegou.

Setu aze cristenien eul loden eur pennad
Deus a vuez sant Thelo hor patron hac hon tad.
Pehini en deus guechal plantet e Breïis-Izel
An had a gomzou Doue hanvet an aviel.

Tud a barrez Landelo o c'houi a zo evurus
D'ha bossedi eul loden deus he gorff precius
Dougit eta gant respet relegou sant Thelo
Ha kersit var he roudou da betec ar maro.

Hiniennou achanoc'h a do poan marteze
Evel sant Thelo guechal o servicha Doue
Meaz na gollit ket courach bars e creïis ar gombat
Songit ho peus bars en env eur sant vid alvocad.

Pa vemp eta bourrevet gant ar boan, an anken
Kenigomp da sant Thelo heb dale eur beden
Sur omp da ve sicouret dre he brotection
Testeni a gemense hor beus en hor c'hanton.

Ped gñech nor beus ket clevet an hini ma hini
Zo bet clan gant poan speret ac ar boan izili,
Casset soken gant clenvet betec dor ar maro
Hac a zo bet pareet cren neur bidi sant Thelo.

Ia Doue dre ar sant-man a ra da gals sicour
En danger deus ho bue var zouar ha var zour
Betec ebars en arme e creis tan ar bresel
Sant Thelo a voar divoal he vignonet fidel.

Rac ze eta tud yaouank hen pedit gant fianç
C'houi pere 'zo destinet da zivoal drapo Franç
Gret oll tro he relegou aroc mont dan arme
Hac ho pezo gueloc'h chang da ober ho conge.

Tadou ha mamou cristen pedit, pedit ive
Ho patron mad sant Thelo evit ho pugale
Rac eneou ho pugale ve ivez en danger
Kercouls evel d'ho corfou pa vent pel deus ar ger.

Hon tud coz a voa devot da bedi sant Thelo,
Ni ive ho bugale dle ober henvel d'ho ;
Baleomp var ar roudou ho deus gret on tud coz,
Hag hor bezo esperanç d'ho guelet er Barados.

Diskan e fin ar chantic :

Dirac ho relegou,
Ni bromet, sant Thelo,
Kerset var ho roudou,
D'ha betec hor maro.

~~~~~  
IMPRIMATUR :

25 mai 1889.

F. OLLIVIER,

Vic. gén.